

KAN BROADUZ

BREIZ-IZEL

War don : *Pa oa potr Lez-Breiz en ti he vam*

I

Ni zo bugale Breiziz Tremor,
Breudeur d'ar Zent dalc'het en enor
Bars en Breiz-Veur hag ebars an Arvor.

DISKAN

War don : *Ha glevas-te (Ker-Is)*

'Rok nebeut amzer Breiz-Izel vo trec'h,
Hag ar peuc'h reno en pep lec'h
Pa zavo Breiziz nerzuz ho brec'h.

II

Rum' ar Vretoned zo a viskoaz :
Bet eo gwech-all gallouduz ha bras,
Hag eun de vo muioc'h gallouduz c'hoaz.

III

Eet eo bet Breiz-Vreur gant ar Zaozon,
Mez birvi ra ar gwad mad breton
En Bro-Gimri, en Skos, en Iverzon.

IV

An Arvor ive hanve he gwad,
— Gaou na laro biken ar gwad mad —
Ha trec'h a vo d'hini an Armeziad.

V

Gand Doue hon mestr, ni vo zavet
 War holl rummou zo en tro ar Bed.
 Rak ni viro gizioù ar Geltied.

VI

Ni viro hon iez, hon iez dispar,
 Kosa hini zo war an douar :
 Gwal-eur d'an den a c'hoanta he diskar !

VII

Ni gar douar Breiz, madefezuz :
 Na oer neblec'h kement evuruz ;
 Enn-hi vefomp da viken difezuz.

VIII

Ni a vir hon feiz 'vel hon zadou,
 Ha nerzuz omp betek ar marou,
 Kaletoc'h omp 'vit kalon an derou.

IX

Euz an evach kre ni a ra kas,
 Pa zo en Breiz gwez avalou c'hoaz :
 Hon c'horf n'eo ket eskern ha kroc'hen kraz.

X

Kaera bro zo 'r bed eo Breiz-Izel :
 Diere vo, pe a vo brezel ;
 'Vit he difenn, ni a wio mervel.

XI

Ar werz neve-man, pa vo kanet,
 A roio joa d'ar wir Vretoned :
 Erwan Verthou 'n euz li 'vit ze zavet.

ERWAN BERTHOU.